

# CANTIK

## EN ENOR DA SANT MIKEL

---

### Diskan.

Otrou Sant Mikel benniget,  
Divar ho trôn uz d'ar stered  
Ni ho ped, Arc'hel dudius,  
Roit d'imp eur zell trugarezuz.

1.

Dre ar bed meur a bobl cristen  
O c'heuz 'vit patron ha souten,  
Ivez nhi, Roudoualekiz,  
O beuz zavet d'oc'h eun iliz.

2.

Eun ilis coant ha kempen  
Uhel var c'horre eun dorgenn  
A veler a bell tro var dro  
Hag a zoug ar zell d'an Envo.

3.

Pebeuz enor 'vit hor parrez !  
Pebeuz boked a levenez !  
Kement a beuz evidoc'h gret  
E leor Doue a zo scrivet.

4.

En ho chapel da bep pardon,  
Ni a bedo a wir galon,

Ni a gemmesco hor moueziou  
Evit goulen ganoc'h graçou.

5.

Pa n'em revoltaz Lucifer  
Enep he vestr hag he grouer,  
Hen zouze, spered ourgouilluz,  
Evel Doue heut gallouduz.

6.

Mes c'hui en em zavaz ractal  
Da gombatti euz an El-fall:

« Piou, eme-hu, a zo hevel

• « Euz Doue hor mestr eternal ? »

7.

Euz Satan hag euz he Eled  
Dizamant c'hui o poa stourmet,  
Ha gant nerz Doue en ho prec'h  
O poa varnezho bet an trec'h.

8.

Lucifer, enebour Doue,  
A zo hon adversour ive,  
Dre finessou ha dre gounar  
Hen glase an tu dont d'hon discar.

9.

En dro d'imp hen a rod bepred  
Evel eul leoun arrajet,  
O Sant Mikel, roit d'imp zicour  
'Vit n'em zioual euz an traitour.

40.

Dre ho calloud, keit ma vevimp,  
Grit, ni ho ped, grit ma torrump  
Ieo mezuz ar sperejou-fall  
Ha ma vimp miret diouz pep goal.

41.

Evidomp, tud divar ar mez,  
Ema caled hent ar vuez,  
Mes na zoujimp poan na drevel  
Mar hor c'honfortit, Sant Mikel.

42.

Lugern a rit e lein an env,  
Prinz euz eled an Doue crenv  
Hag ho carg eo rei d'imp ato  
Aberz Doue madobero.

43.

Pa zigouezomp bugaligou  
Er bed-ma, traonien an daëlou,  
Kerkent c'hui zigass d'imp Elez  
Leun evidomp a vadelez.

44.

Eled-mad prest ato da ren  
Hor paziou en denvalijen  
Ha da ellum n'hon eneou  
An tan-flamm euz ar vertuziou.

45.

Nag a glanvourien ankeniet  
Bep bloaz ganoc'h vè diboaniet ?  
Da gement ho ped gant fianz  
C'hui ro bepret ar pareanz.

46.

Varnomp oll euz pep ker, pep ty  
Zo deut el lec'h-man d'ho pedi,  
Hirio scuillet ho penoziou  
Ken stank ha gliz var hor parcou.

47.

Patron oc'h ive da vro Franz !  
Oh ! pellaït diouthi pep troublanz  
Ma vo c'hoaz hor bro-n'hi, Franciz  
Zoudard Doue hag an Iliz.

48.

Ha pa renkimp eun deiz mervel,  
Renit ac'hanomp, Sant Mikel,  
Var an hent eun d'ar baradoz  
Da renta d'oc'h gras ha bennoz.

*Amen.*

Imprimatur :

Imprimatur : **J. Jégou**, vic. gen.  
**Le Guyader**, vic. gen. *Corisopit.*  
*Vannes, le 21 décembre 1877.*